

# Yann Gonan (1765-1834), ur Breizhad all o kejañ gant an « Indianed »

Al lestr *Sauvage* a reas peñse war aodoù an Douar-Nevez e 1787. En e vourzh edo Yann Gonan. Kontañ a reas e veaj ha kalz avanturioù all bet bevet gantañ en un hir a varzhoneg e brezhoneg. Bevañ a reas e-touez an Indianed e-pad un nebeud devezhioù.

(Testenn e doare-skrivañ an amzer a-vremañ.)



## Goulennoù

1. Petra e oa soñj Yann Gonan diwar-benn ar « sovajed » ?
2. Rak petra o doa aon Yann hag e gompagnuned ?
3. Ha degemeret mat e oant bet pe get ?
4. Lakait keñver-ha-keñver sell Jakez Karter hag hini Yann Gonan. Petra zo heñvel pe disheñvel ?

## Da lenn

- *Les Aventures de Jean Conan / Avanturio ar citoienn Jean Conan*, Skol Vreizh, 1990
- *Jean Conan, aventurier et écrivain breton*, Dastumad glas, niv. 43, Skol Vreizh, 1999
- *Les Aventures extraordinaires du citoyen Jean Conan*, Skol Vreizh, 2001

## gwerzenn 1295

Ha ni pa weljomp partiet ar Saozon ha partiet ar Frañsizien  
Ez ejomp gant ar sovajed d'o c'habanenn  
Lakaet e voemp ouzh an tan gante da dommañ  
Ma c'halon oa sesizet, ne raen nemet krenañ

## gwerzenn 1303

Ne chomas ganimp nemet ur wrac'h kozh diform da welet  
Hag ur plac'hig yaouank pemzek pe c'hwezek vloaz a c'helle da ga(ou)et  
Ar re-se a anavezomp evit bout merc'hed  
Rak difisil e oa o diferañsiñ rak memes tra e oant gwisket

## gwerzenn 1323

Ne oa seurt ebet er gabanenn-se davantaj  
Biskoazh ne'm boa gwelet ur c'hen trist menaj  
An tri all<sup>1</sup> a reas aon din en ur lâret  
E vije me ar c'hentañ a vije debret

## gwerzenn 1341

Ar c'hig a oa ourz<sup>2</sup>, e anaout a raen eus e groc'hen  
Hag ur somon<sup>3</sup> pe zaou hag ar rest pesked gwenn  
Ha roet e oa dimp da zebriñ eus an tammoù gwellañ  
Ha ni a ofras dezhe ivez eus hon bara

## gwerzenn 1385

'Vel ma welomp en Frañs en em gondou al loened  
Emedi er vro-se kondu ar sovajed  
Ar vamm a anavez he merc'h hag he mab  
Mes nompas ma ouife piv a oa bet e dad

## gwerzenn 1969

Rak ar sovajed, war am eus gwelet, ma ne bedont ket Doue,  
Gouzout an tu d'e ofañsiñ ne ouzont ket ivez

N'o deus na ambision na nep jalouzi  
N'o deus ezhomm netra nemet evit debriñ  
Gant kig ha pesked ha jibier en em vevont ervat  
Ha gant o c'hrec'hen e reont o dilhad

- 1) An tri martolod all a oa gant Yann.
- 2) Arzh.
- 3) Eog.